

# CHANSON NEVEZ



1.

Apollon tad eloquant me a invoq da bouar,  
Discoël da lagal brillant ha sel ous ma glac'har,  
Rac ar sujet deus eur sôn a meus c'hoant da rimâ,  
Mes compos dei eun ton, ne allan quet cana.

2.

Troublet eze ma oll sans, ma speret chagrinet,  
Tristet e he ma c'halon, ma memoar tourmantet,  
Deus a sonjou eur fleuren a so quen caer ha quen pur,  
Goechal pa sonjen enni me a moa plijadur.

3.

Pemp bloa ameus tremenet, pemp bloa on deus collet,  
Aboe deus a hanon bars em c'halon blesset,  
Me meus caët ar re-se berroc'h vit pemzec de,  
Aboe e zon o languissan ho sonjal nos a de.

4.

Penos Venus traitourez, ma lezes Cupidon  
Da hoarzin, da folatrin en jardin ma c'halon ;  
Ha te o voelet an daërou continuellamant  
O tont deus ma daoulagad hep caët cessamant,

5.

Soëzet oc'h audïoret, me gred ezoc'h soëzet,  
Pa ne meus quet ar sujet aman dizoloet,  
Me larô dec'h ar gruellan demeus an oll boanniou  
E separi diou galon, difreza ho veuiou.

6.

Ret eo breman separi diou galon unisset,  
Pa na bermet an natur eveint-bi assamblet,  
C'houi tud yaouanq, tud fidel, hac oc'h eus amitié,  
Juget hac en so er bed brassoc'h captivité.

7.

Me a so prisonnier a rest deus ma bue  
Ha quantoc'h vit mervel, so disquennent em be ;  
Ma mestrezic a so ive couls a me captives  
Dedaret on diouti, allas ! evit james,

0  
385

8.

Pichounet ha c'houi coulmet, loenedigou Venus,  
Turzunellet consolant a gri quen hirvoudus.  
Po clewan o hirvoudin e simpla ma c'halon  
Ebars e creis ma yaouanqis pebes punition.

9.

Me as ped eonic bian, te a teus diou esquel,  
Cas evidon eur liser d'am mestrezic fidel,  
So dictet gant an Amour dre huanadennou,  
Ma defo sonch a hanon betec fin e delou.

10.

Lar dei rei dit ma c'halon so-ganti enfermet,  
En eur plaç delicius gant an amourouset ;  
Be diganti eur lizer quent retorn voar da c'his,  
A vo scrivet em faveur gant an dorn am languis.

11.

Nin so n'em separet gant cals deus a regret  
Ha c'hoas n'em requetomp ep gallout en laret,  
Dre ma sellou languissant entre ma ha goelin,  
Ep gallout enem ampech, me ho car, a lerin,...

12.

Oh ! pebeus chanchamanchou a gavan bars em stad,  
Ar c'houquet, tranquillament a serre ma lagad ;  
Me a leze ma c'halon da garet ma mestres  
Na brema n'on quet capabl da dont de c'haucoués.

13.

Arsa ta guerset yaouanq, hoas quent vit finissan,  
Na lezet quet ho calon da garet evel ma ran ;  
Credet abanou guerset pa ver o separin,  
E teu eur galon tener da garet mui ous mui.

14.

Bremá me a vew tranquil ebars em captivite,  
Me a lès an dud yaouanq da redec nos a de,  
Me a ve o repos a neuze o sonjal  
En g'enet ma mestrezic p'e goelin guechal.

F. LECAVALIER.

# MARI BEG A ROG HA FRI PARTOUT

Var ton : *Son an dançou.*

Mar oc'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveout eur vreg rog,  
Me o kunduo, pa guerfet, dirag Mari beg a rog,  
Bemde var dro eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,  
Kerkent teodou pigar c'hartier gant eur skaoun pe eur gador  
A zired oll eu e c'hever; an audianç so digor,

Var barlen Mari e veler eur pes fouldren assied,  
Var bini e cont pep komer kement e deus inventet ;  
Klevet a rër pet den lipous a ya bemde d'ar c'hase,  
Pet plac' e deus tri amoureux, ha pet a zo stad enne ;  
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bil o grague.

Mari beg a rog a gommand var ar c'honseil divragou,  
Eb kaout an nebeuta damant e tigor franck e guenou,  
Pa ne deveus var e bizach na moustachou na baro  
E red déi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro,  
Guêvier, sotoui, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg a rog so titret vel an huella noblanç,  
Dommaj e n'en d'é ket pried d'eun pinvidik a Franç ;  
I é princes an diegi, comtes al liboudennou ;  
I é dukes al loustoni, marquises ar strakellou ;  
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillou,

Kerken a ma ve imbannet daou den yaouank da zimi,  
E ve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari ;  
Pep konseiller en gueleden a boagu gant e vouton bér,

Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer.  
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goas a ve mévier.  
Ar re voassa da zikrial an dud a ya en fortun,  
A zo, evit an ordinal, merc'hed chommet eb nikun :  
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas.  
Hac a gommanç bréma facha, dre ma ne deu den d'ho choas,  
Couskoude an hini gossa n'è ket tri-ugent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eun eured o tont varzu an Ilis,  
Mari beg a rog a zired en manchou lous e hinvis ;  
Evel eur vioc'h oh vreskin e c'haloup abiou ar ru ;  
Holà ! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'harid, deut dious-tu.  
Cetu aman eured Martin, deut da dremen ar révu.

Va c'hommer sellit eus honnes, dislivet e davancher  
E c'horneten zo eb ampes, hac e gueleden re yér ;  
Ho ! sellit-ta eus an deu-mao, pegen striz é e vragou.  
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hirs e voutou,  
Eur chimizeten so gantan var a rochet en pillou !

Pa ve eur vreg kes gouillondet, divars e bugel kentan,  
E c'houlén Mari estonet ; petra, nao mis so dijù ?  
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pól  
Ha pask n'èket c'hoas erruet ; allon ! gréd o deus an tol  
Eb n'o deveus ya c'hemennet, an dra ze a gavan drol.

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eur vadiant  
Mari gant eun troad eb botes, a erru arog ar chant ;  
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raouliet  
Da zikour kana *Te Deum* evit an néve ganet.  
Gant e c'hommerzet e chom e kichen d'or ar vèret.